

h

# NA PEGEN UHEL

EO

# STAD AR BELEK



*War dôn : Salud d'oc'h iliz ma farouz.*

Bezâ a zo war ann douar  
Eunn den ha n'en deuz ket hé bâr,  
Aboé é pignet enn envou  
Jézuz hor Zalver, hon Otrou.

Hanoiou kaër a roer d'ez-han,  
Bélek lérer aliesan  
Sklérijen ar bed, den Doué,  
El soken hel lérer ive.

Setu a-ze, hag a dra sur,  
Komzou tennet euz ar Skritur;  
Rei a reont dimp oll da welet  
Euz ar béleg ann uc'heldet.

Dré eur gomz Moïz a ranné  
Dour ar mor ruz, eunn dé a oé,  
A ré trémen war eunn hent zec'h  
Eur bobl a bez drant ha dinec'h.

Jozué d'ann héol a lévére  
Chomet n'ho sav! hag e chomé!  
Rouaned vraz er bed a zo,  
Krenâ rer arog ho hano.

Galloud ann dud-ze n'eo nétra  
Kenver galloud ann disterâ,  
Ann divezâ euz ar velien  
Euz ann ôter enn oféren.

Pez ne ra ket ar rouaned,  
Mari, ar zent nag ann éled,  
Ar bélek dré eur gomz hep-ken  
Euz aunn env Jézuz a zisken.

Bemde, bépret koulz eo laret,  
Kozler Doué zo distanet  
Dré bédennou hé véleien  
E sakrifiz ann oféren.

N'em ginnig réont war ann ôter  
Spéret ha kalon d'ho Zalver;  
Goude kinnigont da Zoue  
Oll ezomou hé vugale.

Hol lémet deuz dré 'r vadiant  
Euz a skilfou ann èrouant  
Hor c'havel ho deuz binniget  
Hor bugaléach kélenet.

Mar deuomp da gouézel goude,  
Piou hon savo euz al lamm ze?  
Ne d'eo ket barnerien ar bed,  
Ar béleg eo, her goùd a ret.

Etré daou zen, dé ho eured,  
A lak eul liamm ne dorer ket,  
Chaden aour ar briedelez,  
A ra bévâ gant santelez.

Ped gwech n'em euz ket hân gwélet  
Dré ann nouen o rei iéc'het  
Da gorf, da ine war ann dro  
Eur c'hlanvour oa hanter varo.

Er c'hériou brâz, 'vel war ar mêz,  
Piou a zo tad ar beorien gez?  
Ar béleg eo ann tad téner  
Evid ar paour, 'vid ar c'hlasker.

E kichen gwéle eunn den klan,  
Er prisonniou ann tévalan,  
Piou a zizamm hag a ra vad?  
Ar bélek mui 'vit mamm na tad.

Bezâ bélek zo énoruz,  
Hogen ar garg a zo poaniuz,  
Kouskoude gant sikour Doue  
Teuer da garout ar boan ze.

**I : M : A : MERSER,**  
*Person Mellionnek.*

Imprimatur :

**CHATTON, Can. tit.**

